



C'hoarierien "Pastoral Poullaouen" e Bleun-Brug Kastellin

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 67 (Mensuel)
Abonnement : 500 Francs

GENVER 1954

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1954 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant gant miz Kerzu. O fedi start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouen. Met dalc'hit sonj n'eo ket leal nac'h paea ar gelaouenn, goude beza he resevet e-pad bloaz.

Koumanant bloaz	500 lur.
Koumanant a enor	600 lur.
Madoberour	1.000 lur.

Kas an arc'hant da : V. SÉITÉ, Bleun-Brug, Ty-Carré, Châteaulin, C.C.P. 544-22 Nantes — hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNYEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

TAOLENN


Gourchemennou ar c'hardinal	1
Pedenn ar Pab Pi XII d'an Itron-Varia	2
Eur bloaz nevez, gant L. B.	3
Prezegen Dom Alexis-Presse	5
Bleun-Brug an Ao. Perrot	6
Deiz ha bloaz maro an Ao. Perrot, e Breiz	7
Yannig ar C'halvez gant Petronig	8
E lec'h ma werzer ar plac'hed yaouank	9
Buhez ar Bleun-Brug	11
Korn al liziri	14
Skodennou ha profou	16
Noel koz en enor d'ar Rouaned	17



Grit gwelloc'h eget paea ho koumanant :

**Roit Bleun-Brug da lenn en-dro deoc'h.
Klaskit d'eomp koumananterien nevez.
Kasit d'eomp kelier pe skridou.**

133678



D'hon lennerien,
D'hor mignoned,
yec'hed, peoc'h ha levenez
Edoug ar bloaz nevez,
Ha joa ar Baradoz
da fin o buhez.



An Aotrou Kardinal Roques

ARC'HESKOB ROAZON

a ro e vennoz d'ar Bleun-Brug :

« Très sensible aux vœux que vous lui avez offerts, vous en remercie et vous prie, à son tour, d'agréer ses souhaits fervents pour vous et pour la prospérité du Bleun-Brug. Il en bénit les efforts et l'activité qui tendent à rendre la Bretagne toujours plus chrétienne et plus attachée à ses nobles traditions. »

Cardinal Roques.

PEDENN AR PAB PI XII

d'an Itron Varia

evit goulenn eur bed gwelloc'h hag eurusted peurbadus

MMARI, — Mamm dinam Jezuz hag hor Mamm, — estlammet dirak splannder ho kened eus an neñv — ha flastret gant trubuilhou an amzeriou-mañ, — ni en em daol etre ho tiverc'h, — sur ma z'omp da gaout en ho kalon leun a vadelez — ar sevenidigez d'hor c'hoantou birvidik — hag eur c'houstorenn seder, e kreiz ar gwall varrou a zailh warnomp a bep tu.

Gwasket omp gant samm hor pec'hejou — ha koueza reomp dindan bec'h ezommou diniver — ha koulskoude e trid hor c'halonou hag e veulomp — pinvidigez dreist muzul teñzorieu ar c'hras — eo bet plijet gant Doue skuilh warnoc'h, dreist an holl grouadurien all, — adaleg ar mare kenta eus ho puhez, beteg an deiz ma zoc'h bet savet d'ar baradoz ha kurunet Rouanez ar bed.

O eienenn splann a feiz, — torrit sec'hed hor sperejou gant ar gwirioneziou peurbadus, — o lilienn skedus an holl santelez, — kargit hor c'halonou gant c'houez vat an neñv ! — O trec'hourez an droug hag ar maro, — magit ennomp aon bras ouz ar pec'hed — a laka an ene da veza euzus dirak Doue ha sklavour d'an Ifern.

Selaout, o muia karet an Aotrou Doue, an hirvoud entanet a sav eus pep kalon gristen — er bloaz-mañ a zo gouestlet d'eoc'h. — Troit ho taoulagad war hor gouliou glac'harus. — Gwellait kalon ar re fall, — sec'hit daerou ar re ankeniet hag ar re a zo bourrevet, — frealzit ar re baour hag ar re vihan, — mougat ar gasoni, souplait krizder buhez an dud, — dalc'hit en he c'haer, etouez ar yaouankiz bleunienn ar glanded — harpit an Iliz santel, — grit ma vezo chachet an dud war-du ar vadelez kristen. — En hoc'h ano, a glever an ekleo anezañ o tregerni ker brao er baradoz, — ra zeuio an dud d'en em anaout evel breudeur — hag ar broiou evel memprou eur memes familh, — a splannaio warni heol eur peoc'h gwirion ha skignet e pep lec'h.

Digemerit, o Mamm dous meurbet, hor pedennou diste — hag obtenit d'eomp dreist pep tra — gellout eun deiz adlavaret dirak ho Tron, — en eur dañva ganeoc'h an eurusted peurbadus, — ar c'hantig a sav hirio eus an douar en-dro d'hoc'h aoteriou : — Kaer-holl oc'h, o Mari ! — C'houi eo gloar, levenez, enor hor pobl ! — Amen.

EUR BLOAZ SANTEL

KANT vloaz a vezo, er bloaz-mañ, d'an 8 a viz Kerzu a zeu, abaoe m'eo bet diskleriet, evel artikel a feiz, ez eo bet ar Werc'hez Vari konsevet hep pec'hed.

Dre eul Lizer-Meur, skrivet gantañ, d'an 8 a viz Gwengolo diweza, Hon Tad Santel ar Pab, **Pi XII**, en deus graet eur c'halvadenn da Gato-liked ar bed-holl d'en em bouchas, a-zoare, da lida ar c'hantved bras-se. Embannet en deus, en hevelep amzer, e vije ar bloaz-mañ, gouestlet d'an Itron Varia.

Goude beza displeget kelennadurez an Iliz diwarbenn krouidigez dinam ar Werc'hez Vari, Lizer ar Pab a en em astenn war ar menoziou a vezo mat d'ar gristenien lakaat doun en o spered evit o sikour da ober eus ar bloaz-mañ eur bloaz santel...

Ar Werc'hez, galvet d'an enor dispar da veza Mamm d'Hor Salver, a ranke beza adalek ar penn kenta anezi, ar gaëra hag ar santela eus an holl grouadurien. Ne vije ket bet dereat gwelout enni, e mare ebet eus he buhez, an distera saotreadur. Ne oa ket dereat e vije bet, e mare ebet, dindan galloud an droug-spered ; ne oa ket dereat e vije bet tizet, an distera, gant ar pec'hed orijinel.

Mari a ranke beza dinam, e pep doare, adalek m'oa anezi.

Eur gasoni, eun enebiezh peurbadus a zo laketa gant Doue etre an diaoul hag ar vaouez-se « benniget dreist an holl gwragez » hag a vezo saludet gant ar arc'hel Gabriel « leun a c'hras ».

Kredenn an Iliz war ar poent-se a zo chomet divrall, a-hed ar c'hantvedou. Ha setu perak, pa z'eo bet plijet gant ar Pab, **Pi XI**, diskleria, evel artikel a feiz : « ez eo bet ar Werc'hez Vari diouallet diouz ar pec'hed orijinel, abaoe ar mare kenta m'eo bet konsevet » kalonou an holl gristenien a zo bet karget a levenez.

Burzud an Itron Varia oc'h en em ziskouez, e Lourd, pevar bloaz goude a voe digemeret evel eur respont eus an neñv.

Er bloaz 1854 ar Pab en doa diskleriet : « Mari a zo bet krouet dinam. »

Er bloaz 1858, ar Werc'hez he unan a lavar : « Me eo an hini a zo krouet dinam. Dont a ran da harpa ar pezh en deus diskleriet ar Pab diwar va fenn. »

An artikel a feiz embannet gant Pi IX eus krouidigez dinam ar Werc'hez a jach d'e heul an artikel all, diskleriet gant Pi XII, eo bet an Itron Varia dougenet d'an neñv korf hag ene. Daou benn ar jadenn a zo evelse skoulmet. Mari a zo gwisket gant sae ar santelez ha leuniet a c'hloar, en he ene hag en he c'horf, evel m'eo dleet d'an Hini a zo bet dibabet gant Doue evit beza Mamm e Vab, Hor Salver.

Kompren a reomp perak en deus c'hoantaet Hon Tad Santel ar Pab e vije gouestlet ar bloaz-mañ evit lida, gant sked, gloar an Itron Varia.

Evel m'en deus graet, epad ar brezel diweza, Pi XII a laka etre he daouarn a vamm holl ezommou hon amzer-vremañ.

Ar gwel hag ar sonj eus ar Werc'hez dinam ha dibec'h a dle, dreist-pep tra, emezañ, ober d'eomp digeri brasoc'h hon daoulagad war an droug m'eo ar **pec'hed** : ar pec'hed-se hag a c'holo muioc'h mui ar bed hag a zo eienenn guzet an holl drougou, a wash hirio an dud paour hag a zo ar penn abeg, m'emañ ar poblou hag ar broiou en anken.

Ar pal kenta a fell d'ar Pab rei d'eomp da dizout, epad ar bloaz santel-mañ, eo ma tistrofemp eus hon holl galon ouz Doue, ma sikourfemp an dud all d'en em gaout a-nevez gant eienenn ar c'hras : evit ma vleunio kaeroc'h ar vuhez kristen, e pep lec'h ; ha, da heul ar vuhez kristen-se, ar justis, ar garantez, ar peoc'h etouez an dud...

Hag eta, ret eo e teufemp da ledanaat hor c'halonou, d'o digeri da holl ezommou ar bed.

Ret eo d'eomp senti gwelloc'h ouz gourc'hemennou Doue kreski hor pedennou, en em drei, gant muioc'h a fizians hag a aked, ouz an Hini a zo tenzorierz an holl grasou.

Bolontez ar Pab eo ez afe, er bloaz-mañ, ar gristenien a-vandennou da ilizou ha da japeliou ar Werc'hez, evit he meuli hag he fedi hag evit deski gwelloc'h anaout he santelez hag he braster.

Hon Tad Santel ar Pab ne ankounac'ha hini ebet eus poaniou an dud, en deiz a hirio, met, etouez an holl menozioù ma fell d'ezañ e pedfemp evito, e sonj marteze, a ya dreist pep tra, d'ar yaouankizou :

« Ra c'houlennno an holl, gant nerz, ma z'ay war gresk niver an dud yaouank yac'h ha glan, ma n'en em lezint ket da veza taget gant aveliou put ar bed, ma ne deuio ket tan ar gwall youlou da vouga enno bleunienn skedus o oad. Met ma vezo kabestret hag urziet, hervez ar furnez, ar c'hoantegeziou diroll a verv enno, ha ma c'hellint, o trei kein d'al lasou, stignet dirazo, en em zevel wardu ar pezh zo kaer, santel, madelezus, dispar... »

Ma fell d'eoc'h, lennerien ger, e ve ar bloaz-mañ, eur bloavez mat, klevit mouez ar Pab, sentit outi. Ar Werc'hez Vari, ma ouezoc'h digeri d'ezi ho kalon, hoc'h harpo hag ho kennerzo e kreiz an holl diêzaman-chou a gavoc'h war hoc'h hent.

L. B.



10^{vet} Bloavez merzerenti an Aotrou PERROT e Pariz

FEIZ HA BREIZ

Prezegenn graet e Pariz e Itron-Varia ar Parkou, d'an 13 a viz Kerzu 1953 gant an Tad Dom Alexis-Pressé, Abad Bod-Gwenn.

Devise-programme qui a inspiré la vie de l'abbé Perrot. Pour *Feiz ha Breiz* il a donné sa vie, il est mort pour cette devise *Feiz ha Breiz*, Foi et Bretagne, Religion et Patrie, Dieu et Patrie.

Dieu d'abord, à l'encontre de *Politique d'abord*. Homme raisonnable, il avait conscience par sa droite et ferme raison de l'existence, de la transcendance de la Cause Première, du rang qui est le sien le premier.

Chrétien, il avait par sa foi une connaissance plus parfaite de Dieu, de la place qui lui est due.

Prêtre du Christ, de par son sacerdoce, il était qualifié pour revendiquer cette place et pour enseigner aux autres à faire de même.

Breton, de par la tradition ancestrale, il plaçait Dieu en premier rang.

Si les aïeux ont erré sur la nature de Dieu, si parfois, emportés par la passion, ils ont oublié, méconnu sa place, la première, ils n'ont jamais douté de son existence, nié la place qui est la sienne.

Patrie ensuite. La Patrie c'est le cadre naturel, le milieu où Dieu nous place pour que nous y réalisions le pourquoi de notre existence, c'est-à-dire pour que nous sauvions notre âme en servant Dieu, car Dieu nous a créés pour le connaître, l'aimer, le servir.

Il faut, c'est l'ordre imprescriptible, que dans ce cadre, dans la Patrie, nous puissions nous sauver, il faut, tout au moins que, si la Patrie ne nous aide pas positivement à nous sauver, elle ne nous empêche pas de le faire.

Dans la Patrie bretonne, organisée selon la Loi de Dieu, basée sur la foi chrétienne, tout, ordinairement au moins, favorisait le salut, aidait à se sauver : institutions publiques, législation, éducation, enseignement.

Hélas ! dans la grande Patrie actuelle, l'abbé Perrot constatait avec douleur que non seulement la recherche du salut n'était pas favorisée, mais que rien n'était fait pour elle. Bien plus, on a répudié, on professe d'ignorer la religion, toute religion, d'ignorer Dieu.

Certes, étant donné que n'existe plus l'unanimité de croyance comme jadis, mais une diversité très grande, on pourrait à la rigueur admettre en pratique que la Patrie planant au-dessus de tous, car elle est la Patrie de tous, ne favorise aucune croyance, cela pour éviter les désordres, etc., mais qu'elle tolère qu'en elle la foi chrétienne, la foi de la grande majorité pourtant soit, en fait, combattue, contrariée, qu'il y ait un effort constant, puissant pour l'arracher des âmes : que, non seulement elle tolère cet effort mais qu'en fait elle le favorise, ceci est inadmissible.

L'âme ardente, apostolique de l'abbé Perrot en frémissait, et il se tournait vers la vieille Patrie, la Bretagne, *Feiz ha Breiz*.

Ne pouvant rien changer, il résolut du moins de faire tout pour préserver la Bretagne de la déchristianisation menaçante, de combattre l'effort des impies, de le contrecarrer, de le neutraliser en maintenant, en consacrant tout ce qui en Bretagne restait empreint, imprégné de christianisme, propre par conséquent à aider à la conservation de la foi, à contrecarrer l'impiété. De là le *Bleun-Brug*, de là tous les efforts, tous les combats de l'abbé Perrot.


Et c'est ce qui lui valut la haine implacable des impies et c'est ce qui le fit condamner à mort et exécuter. On alléguait, comme toujours, des motifs politiques, on savait fort bien que c'était faux.

Et c'est pourquoi l'abbé Perrot peut être dit *Confesseur de la Foi, Martyr*, c'est-à-dire *témoin du Christ*, témoin de Dieu, pour Dieu.

Pour la Foi, pour conserver sa Foi à la Bretagne, il est allé jusqu'à donner sa vie.

Ce doit être pour nous une leçon que nous devons recueillir, un exemple que nous devons suivre, imiter ; il ne suffit pas d'admirer l'œuvre de l'abbé Perrot, de glorifier son sacrifice, il faut continuer son combat, poursuivre son Œuvre : *Feiz ha Breiz*, pour Dieu, pour la Bretagne, *pour conserver la Bretagne à Dieu et Dieu à la Bretagne.*

Dom ALEXIS-PRESSE.



Bez an Ao. Perrot breman

(Phor. M. an Toker)

Bleun-Brug an Aotrou Perrot

Hervez an toullad liziri hon eus bet, e seblant e vefe bet plijet hon holl lennerien gant hon niverenn « Bleun-Brug » diweza.

Ar 609 niverenn a zo bet moulet ganeomp estreget ar gont, a zo bet sammet e berr amzer.

Setu amañ ar re eus hor mignoned hag o deus roet d'eomp sikour vat da skigna ar ge-laouenn-se. Bez' e c'heller lavaret o deus ar re-mañ enoret an Ao. Perrot estreget dre gomz. Meuleudi ha bennoz Doue d'ezo. Ra vezo o skouer eur gentel vat d'ar re n'o deus klasket ober netra :

Itron ar Moal 10 niv. ; Ao. Abjean, 10 ; Ao. Trevidic, 5 ; Yann ar Minor, 20 ; Gait Coadou, 7 ; Yvon Troal, 10 ; Alan al Louarn, 50 ; Ao. Person Sant-Nouga, 100 ; Ao. Quillévéré, Person Plougerne, 100 ; Ao. Person hag Ao. Kure Scrignac, 20 ; Dr Philippe, 10 ; P. Keraod, 10 ; Itron a Sant-Per, 20 ; Ao. Bihan, 10 ; Ao. an Dault, 10 ; Y. ar Gô, 6 ; V. Séité, 10 ; Ao. Falc'hun, Roazon, 10 ; Ao. Falc'hun, Kemper, 10 ; Ao. ar Sant, 5 ; Ao. de Guebriant, 10 ; Ao. Fichoux, 10 ; Lusian Botorel, 4 ; Ao. Even, 2 ; Ao. Herry-Henri, 4 ; Ao. Bleunven, 20 ; Y. ar Bec, 10 ; Ao. Calvez, 10 ; Ao. Kerouanton, 2 ; Ao. Guillermou, 10 ; L. Roparz, 10 ; Job Séité hag an Ao. Diverres, 20 ; Ch. Moy, Paris, 10.

Deiz ha bloaz maro an Ao. Perrot e Breiz

Lavaret ez eus bet oferennou evit an Ao. Perrot d'an 12 ha d'an 13 a viz Kerzu, e meur a lec'h e Breiz hag el lec'h all.

Evidomp hon eus bet laketañ oferennou e seiz Iliz-Veur Tro-Breiz, hag e Landevenneg, hag aet omp bet, hon unan, d'ar sadorn vintin da glevet an oferenn-mañ, bet kanet e sioulder an abati koz oc'h adsevel, gant ar venec'h. Nag e oa fromus eno, prederia, e-doug an oferenn-se ken devot, war buhez ha war maro tad ar Bleun-Brug.

Eun oferenn all a zo bet lavaret evitañ d'ar sul 13, e Skrignag, gant an Ao. Person, a reas en holl oferennou, ar brezegenn-mañ :

Va breudeur ker,

Hirio emañ gouel Sant Kaourantin, patron Kerne. Ar pardonioù en hor bro a zo deizioù a levez hag a joa : ar c'hanaouennou en ilizoù a vez peurvuia kaeroc'h, al laouennedigez a laka ar c'halonoù da dridal ; e peb parrez eus eskopti Kemper ha Leon e vo kanet meuleudi ar Zant bras : Sant Kaourantin... ha ni, ive, e Skrignak a gemero perz e joa ha laouenedigez ar gristenien all.

Goulskoude deiz pardon Sant Kaourantin a zigas da zonj d'eomp bep ploaz eus eun torfed euzus : eus maro hoc'h Aotrou person mat ha karet : an Aotrou Perrot.

Dek vloaz-zo, da geñver ar gouel-mañ, e veve e euriou diweza hag ar re ac'hanoc'h o devoa hen gwelet o kemeret, mintin mat, hent chapel Toull-ar-Groas ne sonjent ket sur awalc'h, edo o vont, keit-se diouz ar bourg da lavaret e oferenn diweza.

Hirio, va breudeur ker, e c'houlennan, eur wech c'hoaz, kaout sonj ennañ. M'en deus ezomm eus hor pedennou, ni her skoazello ; mar demañ e baradoz an Aotrou Doue... ar pezh a gredan start, rak merzeriet eo bet evit ar feiz, lazetañ eo bet abalamour ma oa beleg... d'ar mare-mañ hen ha Sant Kaourantin a zo o daoulagad war barrez Skrignak, war ar c'hornig douar tostig da Goat-Kernaon e lec'h m'en deus ar beleg ha pastor mat, evit ar wech diweza war an douar-mañ, pedet Sant Patron an eskopti, da skuilha e wella bennozioù war e barrezioniz.

An oferenn hon eus lavaret evitañ, er mintin-mañ : hon dever eo dele'her sonj ennañ. Epad an trizek vloaz m'eo bet en ho touez en deus pedet evidoc'h bemdez pa zave puz an aoter aze, hag hirio eus barr an Neñvou e sell ouzomp gant kalz a garantez. Gant holl Zent hor bro e ped an Aotrou Doue da rei grasou ha nerz d'an dud a zo war an hent mat ha da gaout truez ouz ar re all, rak n'ouzont ket petra o deus great, na petra reont.

Person Skrignak.

Daoust ma ne oa e Koatkeo netra « ofisiel », eun nebeudig mignoned a-en em vodas evelato, en-dro da vez ar Merzer.

Kempennet brao e oa bet ar bez-se en deizioù araok, laketañ warnañ glazvez, bleuniou hag eur groaz keltiek koat eus ar re gaera, da c'hortoz ar bez mein.

Ar re o deus bet darempredet al lec'h-se, e amzer an Ao. Perrot, ar re a oar ar hoan en deus bet kemeret da lakat buhez el lec'h distro-se, a gompren ervat talvoudegez chapelig Itron-Varia-Koatkeo, hag a zo bet skoet a-dra-sur gant sioulder santel ti karet ar Werc'hez Vari.

Ra vezo bepred ar chapel-se eul leac'h a ziskuiz, a beoc'h, a bedenn hag a sklerder evit ar wir Vretoned.

Yannig ar C'halvez

Distroet eo Petronig a varo da veo.
Setu eur marvailh deuet d'eomp digan-
tañ !

Ne oa ket eur Yannig a vil vicher ar Yannig mañ ! Pell ac'hano !
Kalvez e oa ha da ober karrigellou nevez n'en doa ket e bar dre ar c'hanton.
Kement kannerez a zoare o veze gwelet o vont d'ar poull-kanna a veze ganti
he bec'h-dilhad n'eo ket war he c'hein eo met en eur garrigell graet gant
Yann ar C'halvez.

Hag eur garrigel m'hel lavar deoc'h n'eo ket eun tamm hini eo !... Skañv,
didrous, gwigour ebet gant he rod... !



Dizemez e oa chomet Yannig... Hag e oa bremañ tremen tregont vloaz.
Eul luchadennig bennak a rae c'hoaz bep an amzer ouz ar merc'hed yaouank
met ar re-mañ ne raent luchadenn ebet ouz ar paourkez kalvez ! A-greiz pep
kreiz koulskoude e tarzas ar c'helou...

— Yann ar C'halvez a zo o vont da zimezi.

Merc'hed ar poull eo a sonas ar son kenta, na petra 'ta. Eur ganfartez en
doa kavet Yann : penn herez ar burô-butun, Silvette he ano !

— Eun ano sinema, mar plij, vel ma lare Yannig e-unan.

Hor c'halvez ne oa ket stag e deod diouz an daou benn, kredit ac'hanon.
D'an dud a glaske an heg outañ e responte en eur c'hoarzin...

— Lezit da vont... kaer 'zo, c'houi a gendalc'ho da baea ho putun, ha va
c'horn d'in-me a zivogedo bemdez evit netra !



Degouezet eo deiz an embannou.

Yannig ha Silvette, kazell ouz kazell a zo deuet d'ar presbital.

— Eun eured kaer, aotrou Person, a garfemp kaout !

— Mat, mat, Yannig. Graet e vo eun eured kaer d'it. Gortoz pell, gortoz
gwell...

— Ne gousto ket re ger, aotrou Person ?

— Bez dinec'h, Yann, lidou an iliz a zo marc'had mat. Gina a ra an dud
evit rei daou pe dri mil lur d'an iliz evit eun eured, pa zispignont betek
100 ha 150 mil lur evit eur friko.

Bez dinec'h, Yannig. An eured a gousto ugent ha kant gwech gwelloc'h
marc'had eget ar friko, an ostaleri hag ar bal ! !

— O, aotrou Person, eme Yann flemmet eun tammig gant komzou an aotrou
Person, n'em eus ket sonj goulenn aluzen diganeoc'h. Ar c'hontrol eo. Brokus
e vezin, aotrou Person, ha m'ho peus c'hoant me a raio deoc'h, evit paea-hon
eured, eur garrigell nevez flamm.

— Graet ar marc'had, Yann. Eur garrigell nevez ha mat ar stal !



Tremenet eo an eured hag ar friko...

Tremen a ra an amzer...

Plac'h ar presbital a vez gwelet c'hoaz o vont hag a tont gant he c'harrigell
goz.

Ne glever ano ebet eus ar garrigell nevez prometet gant Yann evit paea e
eured.

Eun dervez koulskoude, er sizun a-raok gouel an Holl Sent, setu Yannig o
tont d'ar presbital.

— Oferennou, aotrou Person, am befe c'hoant lakaat gant va zud varo...

— Met, Yann..., mat a rez. Abaoe da eured, Yann, n'em eus ket bet an tu
da varvailhat ganez. Penaos 'ta emañ ar vuhez ganez ?

— Gwelloc'h e c'heffe mont, aotrou Person... Met petra 'fell deoc'h ? Keuz
diwarlerc'h ne dalv ket... Soñjal a ra d'in awechou e oan eürusoc'h va-unan
gwechall oc'h ober karrigellou...

— Karrigellou, karrigellou... eme an aotrou Person. Met Yann, m'am eus
soñj mat... da eured n'eo ket paet c'hoaz ganez.

— Gwir eo, aotrou Person, her gouzout a ran. Prometet em oa deoc'h eur
garrigell, hag ar marc'hajou a ra ar marc'hajou...

Ya, eur garrigel a dlean deoc'h... Mat, aotrou Person, ma vefe possubl deoc'h
freuza an eured ho peus graet, n'eo ket eur garrigell eo a rafen d'eoc'h met
eur c'harr tumporel nevez-flamm.

Petronig.



El lec'h ma werzer ar plac'hed yaouank evel ar chatal e foar Landi

Piou n'en deus ket klevet ano eus ar foariou el lec'h ma veze, n'eus ket
c'hoaz keit-se, gwerzet morianed war marc'hajou an Europ hag an Amerik ?
Ar varc'hadourien wenn a yae da baka ar paourkêz tud du, e-kreiz o
c'hoajou, en Afrik, evel ma 'z eer bremañ da baka marmouzien.

Gwerzet e vezent priz mat d'an Aotroneo o lakae da labourat o douarou
evel kezeg.

Herio n'eo ket morianed eo a vez gwerzet a vil-vern, war marc'hajou ar
c'heriou bras, met plac'hed yaouank, re wenn, o tont eus Breiz pe eus al lec'h
all. Eur wech prenet e vezont kaset da werza adarre, evit eur priz uheloc'h
war marc'hajou all, pelli-pelli, en tu all d'ar mor en eun tu bennak. Kelou ebet
ne vez klevet anezo ken goude.

Marteze e kav d'eoc'h n'eus nemet kaoziou ganin. Ar wirionez eo kouls-
koude. Lennit kentoc'h ar pezh a lennomp war « La Croix », niverenn ar 15 a
viz Here.



Deuet da Bariz eus he c'heriadenn sioul, re sioul moarvat, eur plac'h-
yaouank, Micheline P. he ano, 17 vloaz d'ezi, a gavas labour en eul lec'h
brudet fall.

An istor, eviti, a grogas e-kreiz an noz, en eur bal, eveljust.

Eun Aljerian a deuas a-benn da lakaat warni e grabanou dre bromesaou
kaer.

Ar paourkaez plac'h a gredas. Prestig goude edo kaset dre garr-nij gant kartennou faoz, d'an Afrik. Kompren a reas neuze, met eun tammig diwezat, e oa gwall baket. Kredi a rae, avat e c'hellfe c'hoaz chacha ganti he skasou en eun doare bennak.

Pa zouaras ar c'harr-nij en Afrik, en eun tu bennak war-dro Oran, edod ouz he gortoz. Laket e voe en eur c'harr-tan, ha klozet mat goude en eun ti.

Nebeut goude, ar gwerzter eus Pariz a reseve eun telegram gant ar c'homzou-mañ : « Violettes bien arrivées. Bon parfum, Félicitations. »

Met an telegram-se eo a reas silvidigez Micheline P.

Ar polis a gouezas warnañ, hag ar paotr a ziskuilhas ar wirionez :

« Pep « Violette », emezañ, a gase evelse a roe d'ezañ bep tro 100.000 lur arc'hant. »

Klevet a rit tudou ? Kant mil lur ar plac'h yaouank war marc'had Pariz !! da gas da vro ar vorianed !!!

Micheline P. a zo bet kavet e Ospital Oran, ha dont a reas d'ar gêr a drugare Doue, dizonet mat diouz Pariz.



Kerent Kristen, c'houi hag a lez ho plac'hed yaouank da vont da bell, hep gouzout mat da belec'h e vezont o vont, daoust hag ho koustiañs a c'hell beza e peoc'h ?

Micheline P. a zo bet distroet, met pet ha pet all, milierou bep bloaz, ha ne glever mui kelou anezo, ha ne vez graet netra evit o c'hask : gwerzet, hag aet den ne oar da belec'h, da uza o c'horf ha da goll o ene e kont eul loustoni bennak.



Ma renk ho re yaouank-mont peñ da c'hounid o bara, gouezit, araok rei frankiz d'ezo, da belec'h emaint o vont.

Ma renkont mont da Bariz, gouezit ez eus eno eun ti evit o digemer, evit beilha warno ha klask labour d'ezo. An ti-se eo : « L'entraide bretonne, 3, rue du Départ, Paris. 14°, e-kichen gar Montparnasse ».

Skrivit d'an ti-se, ha roit d'ezañ ano ho tud yaouank ma renkont mont da Bariz da c'hounid o boued.

Gwelloc'h eo avât, e c'hellfent chom er vro : yac'husoc'h d'o c'horf, diris-kloc'h d'o ene.

B. B.



Lennit e Bleun-Brug ar miz a zeu :

Frederik Ozanam, gant L. B.

Ar skoazellêrez familh, gant eur plac'h yaouank.

Eur sarmoun eured, gant an Tad C.

Aluzenn an diaoul, gant ar breur Dominik.

Pajenn al labourer douar, gant an Ao. de Guebriant.

Kenteliou evit ar yaouankiz, gant L. Lok.

Kornig ar vugale.

An diouer a blas eo a ra d'omp kas an holl bennadou-se d'ar miz a zeu.

BUHEZ AR BLEUN-BRUG

Ar sekretour en deus bremañ eur c'harr-tan.

Dre vadelez an I. a Rohan-Chabot hon eus ive bremañ eur « roneo » hag eur skrivez nevez. Bennoz Doue d'ez i greiz kalon.

Abaoe Bleun-Brug Kastellin, en deus ar sekretour skrivet pe respontet da 574 lizer hep konta an taoliou pellgomz, nag al liziri-kelc'h.

Bleun-Brug 1954 a zo loc'het mat.

E Gwened, el lec'h ma vo an hini bras d'an 30 ha 31 a viz Gouere, ha d'ar c'henta a viz Eost, emañ dija war-sao ar c'homite lokal.

Bleun-Brug Bro-Dreger a vo e Pleuvian d'an 30 a viz Mae, en enor da sant Vaodez, hag hini Leon ha Kerne a vo e Lokournan da lun ar Pantekost, en enor da sant Herve, patron ar varzed hag ar ganerien bobl. Dalec'het eo Landivizio evit eured-aour ar Bleun-Brug er bloaz a zeu.

E Bro-Dreger hag e Bro-Leon, emeur o vont da weladenni ar muia ma vo gellat a skoliou evit klask o lakaat da gemer perz e kenstrivadegoù ar Bleun-Brug.

Daou zevezad studi hon eus bet e-doug vakañsoù Nedeleg : unan e Lesneven evit Bro-Leon, hag eun all e Sant-Brieg evit eun nebeut renerien strolladoù re yaouank. Eun devez-studi all a vo e gwened evit renerien ar c'helc'hioù, ar bagadoù hag ar strolladoù re yaouank, d'ar sul 28 a viz C'houevrer.

Bodadenn studi Lesneven.

Eun daou-ugent bennak a dud, beleien koulz lavaret holl a en em gavas e ti ar Retred, e Lesneven, evit eun devez studi, d'an 30 viz Kerzu.

Da genta, V. Seite a zisplegas petra 'vo ar Bleun-Brug e 1954 ha goulennet en deus digant pep hini labourat war an dachenn m'eo an aesa d'ezañ : parrezioù, skolioù, lazou-kana, kelc'hioù...

An ao. Bihan aluzener ar Bleun-Brug evit eskopti Kemper ha Leon, a lavaras gant kalz a dan hag a sklerijenn petra c'hortoz ar Bleun-Brug digant ar parrezioù hag ar skolioù : hor c'hompren, kredi ennomp, rei d'omp an dourn. Muioù eget biskoaz, p'en deus komzet hon Tad Santel ar Pab, eo start hon diazezoù.

An ao. Bleunven, rener ar gelaouenn a gomzas goude eus « Bleun-Brug » heritour e « Feiz ha Breiz ». 1.100 koumananter a zo : 780 er Finister, 57 er C'h.-d.-N., 32 er Morbihan, 171 e Bro-C'hall, hag 48 e diavéz-bro. Hep beza pinvidig, ar gelaouenn a c'holo he mizou. Met re lezirek eo al lennerien da adkoumanant. Kenlabourerien da skriva enni ar garted ive kaout muioù.

Goude mereñn emañ tro an ao. chaloni Fave, aluzener-meur ar Bleun-Brug. Kelou a roas eus an enklask graet gantañ e keñver ar bersoned a-zivout ar c'helc'hioù-keltiek. Ar responchoù niverus deuet d'ezañ a zo holl a dû nemet unan pe zaou. E c'heller lavaret ez eus herio 4.000 a re yaouank er c'helc'hioù pe er bagadoù. Mont a-eneb d'ezo ne vefe ket fur, gwelloc'h eo klask ober vad d'ezo, o skoazella, o c'huzulia.

An ao. Loeiz ar Floc'h a zispleg d'omp talvoudegez ar sevenadur breizek, ken evit an den, ken evit ar c'hristen. Tra ar Breizad eo ar sevenadur-mañ, ha n'hon eus gwir ebet da chom diseblant dirazañ. Ar Bleun-Brug oc'h en em harpa war diskleriadur ar Pab a zo war an hent ma tlefe tremen drezañ an Holl Vretoned.

Gañt an ao. chaloni Falc'hun, kelenner e skol-veur Roazon, ar gaoz a zo lakat war eun dachenn skiantekoc'h c'hoaz. Talvoudegez hor yez a zou da veza skleroc'h-sklera evit an dud desket. Ret eo he laaat e stad da vont er skol, ledanaat d'ez i eno he flas, ha sevel levrioù evit-se.

Edo ar vodadenn-studi-mañ, dindan paeroniezh an ao. chaloni ar Ster, ensellour ar skolioù kristen, ha dindan renadur an ao. Dujardin, penn-rener komité Bleun-Brug Leon.

O tont goude hini Boulvriag evit Treger-Goelo-Kerne-uhel, sur oun he devo graet vad ha gounezet da labour an ao. Perrot diskibien gredus.

Bodadenn studi Sant-Brieg.

Gouestlet e oa ar vodadenn-mañ, graet e Sant-Brieg d'an 3 a viz Genver, d'eun nebeut pennadureziou kristen eus ar c'helc'hioù Keltiek, ha Bagadoù.

Ugent ec'h en em gavemp e bureo an ao. Loeiz ar Floc'h, er beure-se ha betek an noz, deuet eus pevar c'horn Breiz.

Prezegenn ebet. Pep hini a zisplegas ar gudenn hervez ma 'c'h en em gave en e pered : gouzout penaos e c'hell ar Bleun-Brug rei skoazell d'ar c'helc'hiou ha d'ar bagadou war an dachenn gristen ha breizek.

N'eo ket mont a-enib « kendalc'h » eo a glaskomp, met aesaat d'ezañ e labour, ober e-keñver ar c'helc'hiou kristen ar pezh n'hell ket ober. Embann studiadegoù, a c'hello servichout d'ar renerien. Sevel abadennoù-studi da gelenn ar pennoù, da zeski d'ezo penaos kas en-dro strolladou yaouankiz breizat.

Evit-se e vo eun deveziad-studi e Gwened d'ar sul 28 a viz C'houevrer.

Klasket e vo ive lakaat war-sao eur skol-hañv evit an hevelep re, mar deo posubl hag eul levraoueg a 50 levr pe war-dro, a c'hellfe mont eus eur c'helc'h d'egile. Emeur o studia ar gudenn.

Bodadenn an F. C. B.

D'an 31 a viz Kerzu eo bet dalc'het e Kemper bodadenn an F. C. B. (Fondation Culturelle Bretonne) dindan renadur an Dr Vourc'h, L. Toulemon, hag an ao. Mocaer.

Savet ez eus bet eur priz a lennegezh a 10.000 lur, kinniget gant an F. C. B. d'an oberenn wella e brezoneg.

An ao. chaloni Falc'hun hag an ao. Trepos a zo karget da sevel eur goulenn evit ma servicho ar brezoneg da c'hounit ar « bachot » ha nann evit gounit eur meneg (mention) hepken.

Studiet eo bet goude, pell hag hir, kudenn an doare-skriva, hag anvet dek den eus pep koztezhenn a en em vodo bep sul genta ar miz evit studia an afer-se, pen doare ma vo an darnvuia a-du. Emgleo hag unvaniezh hepken eo a glasker evit mat ar yez.

Kenstrivadegoù ar Bleun-Brug.

Prest eo danvez ar c'henstrivadegoù evit ar vugale hag ar re yaouank : displega ha kana.

Skrivit d'eomp (Bleun-Brug, Châteaulin) evit kaout, evit netra an displegadennou hag ar c'hanaouennou ret.

Kanaouennou al lazou-kana a c'hell beza goulennet ivez er memes lec'h : 4 mouez A — 4 m. B — 3 m. disheñvel — 3 m. ingal — 2 vouez.

Prezegerezh : 20.000 lur briz.

An ltron a Rohan Chabot a ginnig daou briz a 10.000 lur (unan evit ar baotred, eun all evit ar merc'hed) evit ar prezegerezh.

Setu amañ danvez ar prezegerezh evit 1954.

« Diskouezit penaos e c'hell ar c'han, hada levenez e buhez an den : e-kreiz e labouriou, e bedennou, e amzer vak, e c'hoarioù, e boaniou zoken... (soniou, gwerzioù, kantikoù — soniou farsus, soniou a garantez, kanaouennou war an darvoudoù laouen pe drist, darvoudoù istor). Soñjal eo ar c'han d'ar vuhez evel ar bleunioù d'ar parkeier, an dantelezh, d'ar c'hoef, ar c'hinkladurioù d'an arrebeuri... »

Bez e c'heller goulenn digant ar re goz evit gouzout penaos edo ar c'han gwechall. Gwelit penaos emañ herio ha perak eo aet war a-dreñv ...penaos e c'hell beza warc'hoaz. »

Ar brezegenn ne dle ket padout ouzpen 8 munut, ha dindan eñvor e ranko beza displeget. An danvez o veza hir, pep hini a c'hell displega eul lodenn pe lodenn hepken eus an danvez-se, hervez ma plijo gantañ.

Ar brezoneg er skol.

Kaset eus bet da skolañ Sant-Salver Redon, war c'houlenn an ao. Marquer : 10 yez hon Tadou ha 10 kofc'hennou. — Da Sizun (ao. Brisson) : 8 yez hon Tadou hag 8 Le Breton par l'Image — Bleimor, Paris : 10 yez hon Tadou, 4 kofc'hennou — Ploneour-Lanvern, skol ar merc'hed : 1 yez hon Tadou, 1 Le B. par l'Image.

Paet ez eus bet d'eomp gant ar F. C. B. evit ar skolioù, 500 levr yez hon Tadou, pignet digant B. A. L. B. : 125.000 lur.

Guy Etienne eus Paris en deus profet 500 lur evit kef ar brezoneg er skol.

Kervreiz, 43, rue Saint-Placide, Paris, a ra skol vrezonek bep gwener ha bep sadorn da 6 eur ha da 8 eur noz.

Skol vrezonek a reer c'hoaz e lise Condorcet, e Paris hag e Saint-Germain-en-Laye.

E Keranna-Yerres (Paris) ez eus eur skol evit ar vugale gant Kerlann.

Ministr an deskadurezh en deus nevez bodet eun nebeut tud eus ar F. C. B. e Pariz, diwarbenn deskadurezh ar brezoneg. War a gonter e vefe aotreet bremañ ar brezoneg evit ar brevet.

C'hoariva brezonek.

Patronaj Sant-Turio (Morbihan) dindan renadur an ao. Loric, kure ar barrez, o deus roet da geñver Nedeleg « *Ar hent Bethlehem* » eur mister Nedeleg gant Job ar Bayon e dek taolenn.

C'hoariet eo bet ar pezh-c'hoari-se e Sant-Turio d'ar 24 a viz Kerzu. Roet e vo e Melrand d'an 10 a viz Geñver, e Plumelio d'ar 17, e Moreac d'an 31 hag e Sant-Turio eun eil gwech d'ar 7 a viz C'houevrer dirak an ao. meur Baron vikel vras ha pennadurezioù ar Bleun-Brug.

Evit trugarekaat ar strollad-mañ eus al labour breizek a ra, en deus ar Bleun-Brug kinniget d'ezañ 10.000 lur.

N'hon eus gwelet na klevet ano ebet e vefe bet c'hoariet pezioù brezonek e neblec'h all da geñver Nedeleg. Piou a c'hello hor sklerijenna ?

Muioc'h a ze a anaoudegezh vat a d'eomp da gaout evit strollad Sant-Turio pa zalc'hont mat en despet da bep tra.

Barr-Heol.

Komite Bleun-Brug Bro-Dreger-Goelo-Kerne-Uhel, en deus savet eur gelaouennig roneoskrivet, trimizie, evit beza eur stag etre ar re holl a labour evit lakaat war-sao Bleun-Brug Pleuvian. Heti a reomp d'hor c'hoarig beza eur barr-heol skedus ma savo diwar e dōmder eun eost kaer ha founnus. Evit kaout ar gelaouennig, skriva d'an ao. Le Saint, kure Bourbriac (C.-d.-N.).

Chaloned nevez.

Laouen bras omp da ginnig hor gwella gourc'hemennou d'an ao. Falc'hun kelennet er c'hloerdi bras, bet e penn « Kroaz Breiz » hag an ao. Nedelec, sekretour an eskopti, o daou nevez anvet da chaloni.

Aet da Anaoun.

« Bugale an tiegezh Roparz eus Poullaouen, Job, Edmond, Eujeni, Loeiz ha Marsel, a gas kelou d'eoec'h eus maro o mamm, digouezet da zevrez gouel sant Korantin, d'an 12 a viz Kerzu warlec'h eur vuhez gouestlet d'he zud, d'he bro-ha d'he Doue. Pedit evit. »

Plijet gant bugale an hini dremenet digemer amañ hor gourc'hemennou a gengañv.

Deuet d'ar vuhez.

Anne-Marie, ha Jean-Yves Queffelec eus Brest, o deus bet eus ar Baradoz daou vreur bihan : Herve ha Pol. Yec'hed d'ar vugaligoù : gourc'hemennou d'ar gerent.

KORN AL LIZIRI

En dro-mañ omp laketa gwall-nec'het gant Korn al lizeri. Kement hon eus resevet ha ken bihan eo ar plas amañ, ma rankomp ober eun dibab en o zouez.

Bennoz Doue d'ar re o deus kaset d'eomp o gourc'hemennou a vloavez mat. N'hellmp biken respont da bep hini, setu perak ho pedomp d'hon digarez!

Setu hetou hor Mignon a Landreger :

« Spered santel, Spered a sklerijenn,
Plijet ganeoc'h ennomp bremañ diskenn.
En hon c'halon, c'houezit, c'houezit e-leiz,
Karante Doue hag hon Breiz.
Poanomp eta mut-ouz-mut
Gant hon labour santel.
A-greiz kalon eo d'it poania,
Hag an Neñv a zeuy d'az skoazia. »

Ao. B.

« ...Amañ e vez graet labour vat. Emaomp o loja en eur maner ! Bep sadorn da noz e ran skol vrezonek d'eun dousennad bugale. Kana a reont ivez. Bep sadorn goude koan, en em vod an tiegeziou vrezonek e ti hemañ pe hen-hont, diouz tro, hag e kanomp hag e varvailhomp e brezoneg. Nozveziou laouen e vezont, m'hell lavar d'eoc'h ! Goude-se e vez servichet eur bannac'h kafe, ha da gousket !

Nevez 'zo eo digouezet Alan al Louarn hag e diegez da chom evit mat e Keranna. Gwell-a-se, rak brezonegerien int holl. O veza m'emaomp amañ war ar-maez e kav d'eomp emaomp ivez er vro ! Ma c'hellfemp beza paeroniet gant eur Geranna bennak e Breiz, se a vefe kaer, neketa ?

Kenkouls labour a vez graet e Pariz e Kervreiz hag e lec'h all. Krog omp da vad gant ar skol. Skol ar gwener a ra berz.

« Skol-Veur ar Bobl » hon eus digoret. Neb a gar a c'hell dont da glevet dispaka, e brezoneg, kudennoù a vefe mat da c'houzout da n'eus forz pe vrezoneger. Siouaz ! n'eo kev evel-se emañ kont, pa n'eus skol all ebet evit c'hoaz o tiskouez d'ezo penaos kaout lorc'h gant ar brezoneg. Emaomp krog gant studi ar Barzaz Breiz, hini an anioù lec'h, hag all...

Ar bloaz a zeu a vo eost founnus diwarnañ, me gred.

Kerlann.

« ... Si vous avez quelque temps, j'aimerais que vous me disiez brièvement où en est actuellement la cause bretonne et surtout sa langue. ... La défense de la culture et de la richesse d'un peuple est un hommage rendu à son Créateur. »

Abbé R. (Ilet-V.).

« ... Je tiens à vous dire, avec un peu de retard, toutes mes félicitations pour ce magnifique Bleun-Brug de Châteaulin. Ce fut vraiment splendide. Qu'on vienne me redire qu'un Bleun-Brug est de la « Bragou-brazerie » ! Vraiment, ce fut beau, très beau ! Je garde un souvenir spécial de cette messe de minuit sur l'Aulne et du « Da Feiz hon Tadou koz ». Bravo donc, et bon courage pour le Blun-Brug Gwened. »

Abbé A. N., Saint-Brieuc.

« Je ne suis pas né en Bretagne. Seule la famille de ma mère est de Saint-Malo. Malgré cela, tout ce qui est breton ou cette me passionne. Je suis sonneur du C. C. de Toulouse et membre de B.A.S. J'ai 18 ans et suis étudiant. Mon plus vif désir ? Connaître la langue de mes ancêtres et la mienne. »

Perig H., Binlauer.

« ... Digouezet eo d'an deiz merket, an niverenn Bleun-Brug gouestlet d'an Ao. Perrot. Dispar eo, gant ar fotoù hag all.

Gourc'hemennou kalonek evit an holl labour ha tregas kouezet warnout.

Da boan he deus douget frouez mat, graet levezet da ene an Ao. Perrot ha d'e holl vignoned.

— Prezegenñ an Ao. 'n Eskob Duparc, a ro eur pouez souezus d'an holl skridoù all... »

L. B., Beleg.

« ... Dont a ran d'ho trugarekaat evit an traou kaer ho peus lakeat e « Bleun-Brug » miz Kerzu diwar-benn an Ao. Perrot, Doue r'e bardono. Ya, traou kaer ha gwir ho peus skrivet... hag hor c'halon a dride ouz o lenn. Me a za bet seiz vloaz e Skrignag-gant an Ao. Perrot. E zikouret em eus bep bloaz evit gouelioù Breiz. Ha bep bloaz hor bugaligoù o deveze prizioù brao. Hen eo en deus great d'in kompren talvoudegez hor gez. E drugarekaat a ran... Me ' garfe rei d'an holl, karaniez hor yez kaer. Setu perak bep lun e ran eur pennad skol vrezonek. Oh ! an dachenn n'eo ket plean, rak siouaz ! bugale L. savet e galleg fall, a za diés da ren war ar poent-mañ. Ar c'han vrezonek a blij a-walc'h d'ezo... »

D¹⁰ V. G.

« Plijet tre oun bet gant d'heza niv. B. B... Lennet em eus pennadoù, d'an dud yaouanek a zeu du-mañ bep meur da zeski brezoneg.

Dimerc'her arak Nedeleg e oa eur veilhadez e Brest etre brezonegerien. An Aotrou beleg Ar Bihan a oa gantimp ha kavet em eus gantañ peza glasken : nao niverenn eus B. B. an Ao. Perrot... »

D¹⁰ Y. M., Brest.

« Plijet on bet gant niverenn miz Kerzu, B.B. gouestlet d'an Ao. Perrot. Nag a gentellout en e vuhez hag en e ober ! Eürus an den a gred en e gefridi evel m'en deus great heñ... »

L. B., Landenne.

« ... Gant plijadur e kasan d'eoc'h ar 500 lur evit va c'houmanant nevez da B.B. Lennet em eus gant doujañs ho pennadoù en eñvor d'an Ao. Perrot. Disul, e Pariz, hon eus ivez lidet mat, 10 vet-bloavez maro ar beleg breizad ha santel-se... »

Beur Erwan.

« ... Kas a ran d'eoc'h eur gontadenn all... Hepdale e kasin ivez va adkoumanant da V. B. a blij kenañ d'in. Aes eo da lenn ha skrivet en eur yez buhezek, gant pennadoù liesdoare... »

R. G. (Missy-sur-Aisne).

« ... Le numéro sur M. Perrot m'a ravie, surtout l'article de Maodez Glandour... Combien je voudrais voir transporter à Saint-Vougay le corps de notre saint martyr national ! La foi des Léonards l'obligerait à faire des miracles... Tous les jours je demande la béatification de Erwan Nicolazic, patron des paysans de chez nous, de l'abbé Perrot et de Mgr Tréhou... »

I. a S. P.

« Tud « Skourr Breiz », bodet hirio e Kervreiz, a gas d'ar gelaouenn « Bleun-Brug » o gwella gourc'hemennou evit al labour vat kaset gant da benn e-kerz ar bloavez tre-menet. Meuleudi dreist-holl evit an niverenn diwar-benn an Ao. Perrot.

« Karout a rafent gwelout moulet war ho kelaouenn, keleier spits diwar-benn buhez ar brezoneg er parrezioù : ano ar barrez, an dud o deus c'hoariet en eur peza-c'hoari brezonek pe kanet en eun abadenn bennak... »

Kerlann.



KRENNOU - LAVAR

Eul louzaouenn a zo er prad
A reer anezi huanad
Dimezet ho pezo-hi
Nemet furnez a ve, leiz an ti.

Ar re yaouank pa zimezont
Na prena eul liorz a dfeont
Hag enni planta a zo ret
Louzaouenn ar basianted.

N'eo ket bleo melen ha koantiri
Eo a laka ar pod da virvi.

Arak lammet, gouez e pelec'h
Evit na dorri na penn, na brec'h.

Sonjal a ra, ha da zoñjal en deus,
Ma timez er bloa-ma, er bloaz a zeu en devezo keuz.

Skodennoù 1954 d'ar Bleun-Brug ha profoù

Ao. hag itron Jakez ar Minor : 3.000 lur — chaloni Mear, Plouvern : 500 lur — ao. Quemeneur, person Penhars : 500 lur — ao. Kervella, Landreger : 500 l. — ao. du Hergouët, Kastell-Paol : 200 l. — kabiten Després : 1.000 l. — ao. Bescond, rener skol Sant-Gharlez, Kerfeunteun : 500 l. — ao. Klerk, person Buhulien : 500 l. — Maodez Sette, Kleder : 500 l. — ao. J. Queau, Sant-Koulitz : 1.000 l. — Tad Y. Le Jolléc, Lyon : 500 l. — ao. hag itron Guilcher, Nancy : 2.500 l. — Dr Kervran, Paris : 1.000 l. — ao. Gueguen, Pont-n-Abad : 1.000 l. — ao. Coguic, person ar Sant (M.) : 500 l. — ao. Jezequel, kure Pleyben : 500 l. — ao. Gassot, Treboul : 500 l. — Marie Sette, Plabennec : 500 l. — Tad Chapel, Kemper : 500 l. — Tad Carr, Kemper, 500 l. — Tad Nicot, Kemper : 500 l. — ao. P. Le Moyne, Mael-Karahez : 500 l. — ao. hag itron Richard, Naoned : 1.000 l. — ao. Barzio, Quédillac : 500 l. — Dr Laurent, Toulon : 500 l. — ao. Pradig, La Chaume : 500 l. — ao. baron de Mauny, Saint-Germain-en-Laye : 500 l. — ao. Larvor, Lyon : 500 l. — ao. Cloarec, person Pouldergat : 500 l. — koronel Malleray : 500 l. — ao. Pichon de Longueville, Paris : 500 l. — Gaët Coadou, Lokronan : 500 l. — D^{ne} M. Mével, Ploare : 500 l. — Dr Jacuen, Kerlouan : 3.000 l. — ao. Quillévére, person Plougerne : 500 l. — ao. Bihan, Guinée-Franc : 500 l. — ao. Tardy, Paris : 500 l. — ao. Merret, Carantes : 100 l. — D^{ne} Cazin, Glomel : 500 l. — ao. Souppès-Després, Guipavas : 500 l. — ao. R. Audic, Ploare : 500 l. — D^{ne} Mazeas, Guengamp : 100 l. — Dr Saout, Penvenan : 100 l. — Tad Lemarié, Orveau : 100 l. — ao. M. Henrio, Pontivy : 100 l. — Dr Breton, Bourbriac : 100 l. — ao. Cozien, Guilers : 500 l. — itron Brigant, Ploubezre : 200 l. — ao. Le Goff, person Plouencour-Trez : 500 l. — ao. Bihanic, Lannilis : 1.500 l. — ao. chal. Nedelec, Kemper : 100 l. — Tad Eujen, an Oriant : 200 l. — ao. Toullec, Montereau (S.-et-O.) : 100 l. — ao. Prat, Paris : 100 l. — chal. Guivarc'h, person Landivizio : 1.150 l. — Sr Anne Ronan, Plogonnec : 600 l. — ao. Calvez, Naoned : 100 l. (Da heññ!).

Evit beza ezel eus ar Bleun-Brug, kasit 200 lur (parper) — pe 500 lur (ezel) — pe 1.000 lur (ezel madoberour) da V. Sette, Bleun-Brug, Châteaulin (Fin.). C.C.P. 544.22 Nantes.

**Roit Bleun-Brug da lenn en-dro d'eoc'h.
Klaskit d'eomp koumanterien nevez.**

LENNIT :

Le **Courrier** ha **Progrès** du Finistère, rue des Gentishommes, Quimper. Koum. 500 l. (sizuniek).
Bro **Guened** (e brezoneg Gwened) abbé Le Palud, Ecole Saint-Joseph, Vannes : 250 l. (miziek).
Barr-Heol (Bleun-Brug Bro-Dreger) abbé Le Saint, vicaire, Bourbriac (C.-d.-N.) (trimiziek).
Al **Liamm** (kelaouenn Lennegel) : P. Le Bihan, 13, route de Vaugirard, Meudon (S.-et-O.) : 1.000 l. (miziek).
Ar **Soner**, H. ar Meur, B. P. 25, Quimper (Fin.) : 500 l. (miziek).
La **Terre Bretonne**, 3, rue du Départ, Paris (14^e) (diou wech ar miz) : koum. 400 l.
La **Bretagne à Paris**, 114, av. Chemp-Elysées, Paris (8^e). Koum. 720 l. (sizuniek).
Pedenn evit **Breiz** : L. Le Floch, 5, rue des Capucins, Saint-Brieuc (C.-d.-N.) (trimiziek).

PRENIT :


Buhez H. S. Jezuz-Krist — Buhez sant Fransez — Bleuniou sant Fransez — Fatima — Diwar o'hoarzin — Miz Mari ar grasou... O goulenn digant : Couvent des Capucins, Roscoff (Finistère).

GOULENNIT eun deiziadure brezoneg digant « Al Liamm ». Prenit d'ho pugale al levr kaer « Le Breton par l'Image » (Librairie La Fayette, Landerneau).

DESKIT ar brezoneg gant al levr « Yez hon Tadou » (Bleun-Brug, Châteaulin).

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.F.P.P. N° 21697

Novel koz en enor d'ar Rouaned



Tri virakl bras a gavan — Pa lennan
Ofis santel an de-mañ.
Me ho ped 'ta holl kristenien,
D'o selaou — D'o selaou 'vit o c'hrompren.

Er c'henta 's ar miraklou — Hep ger gaou,
'Voe badezet Hon Aotrou.
E voe badezet Hor Salver
Gant Sant Yann — Gant Sant Yann e-barz ar rivier.

An eil mirakl sur a voe — Klevet se,
Eured Kana 'r Galile,
Pa voe an dour e gwin cheñchet,
Dre vertuz — Dre vertuz Jezuz en Eured.

An trede oa pa deuas — Gant joa vras,
D'adori ar Mesias,
Tri Roue eus an Oriant,
Ha ganto — Ha ganto holl bep a brezant.

Eur steredenn 'zo savet — Gant sklerded,
Diouz al lec'h ma voe ganet,
Ha war he lerc'h ar rouane
A zo deut — A zo deut da glask o Doue.

Ar c'henta a oa Gaspar — Hep tamm mar ;
An eil a oa Baltazar.
Setu ano an tri Roue.
Melkior — Melkior e oa an trede.

D'an daoulin o deus stouet — Gant respet ;
Aour, mir, ezañs 'deus roet,
Ha dre-se o deus diskouezet
O devoa — O devoa o Doue kavet.

Baltazar mir a roas — Gant prez bras,
Da Jezuz ar Mesias.
Rak Jezuz, Doue eternal,
Evel den — Evel den a dle mervel.





PHOTO JOS LE DOARÉ

Ar roue Gaspar a ro — Deut e dro,
 Kaera aour a zo 'n e vro,
 Ha d'an holl dud ar prezant-se
 A ziskouez — A ziskouez oa Jezuz roue.
 Hag ar roue Melkior — Gant enor,
 Ro ezañs d'hon Redemptor,
 Ha dre an ezañs e tiskouez
 Ec'h anvez — Ec'h anvez Jezuz 'vel Doue.
 An tri roue a ya kuit — Magnifik,
 Goude renta o bizit ;
 Gant Doue int avertiset
 Da cheñch hent — Da cheñch hent ha da vont bepred.
 'Velse ive kristenien — Pec'herien
 Heuilhit holl plên ho lezenn,
 Cheñchit hent, lezit ar pec'hed
 Ma fell d'eoc'h — Ma fell d'eoc'h beza pardonet.